

KELEIER AN NAONED

Priz ar
skouerenn

3 F



NIVERENN 5

MAE 1976

Luc'hskeudenn ar golo : Moridigezh ul lestr er chanter Dubigeon-Normandie e kêr an Naoned (al lestr Stolt Pride, moret e miz Mezheven 1975) (Luc'hskeudenn Dupisson).

Lizhiri

AR PELLGOMZ GALL, UR VEZH RUZ

Lennet em eus ho kelaouenn dindan he stumm nevez a gavan plijus-meurbet ha ne c'hellan nemet hetit deoc'h derchel ganti hag evit-se kavout lennerien niverusoc'h-niverusañ.

Souezhet on bet avat p'am eus lennet en ho pennadig diwar-benn ar pellgomz e Bro an Naoned (p. 15, niv. 1, Genver 1976) «ez ae an traoù war-raok». Moarvat, e rankont mont, un tamm bihan da nebeutañ, amañ hag ahont, nemet, daoust da bromesaou kaer ar vinistred, e chom ar gudenn diziskoulm ha kalz tud o deus goulennet bezañ stag ouzh ul linenn bellgomz bennak a rank gortoz ha, Doue 'oar, pegeit e raint.

Her gouzout a ran-me rak o vezañ savet ur goulenn dres goude diskrog-labour paotred ha merc'hed al lizhiri, n'am eus bet keloù ebet abaoe nemet un tammig lizher da lavarout din e oa kaieret da vat va goulenn ha ne oa ket ret din, rak se, skrivañ adarre.

Evel se 'ta en «ur gevredigezh frankizour hag aet war-raok», 16 miz goude bezañ savet goulenn e chom ar goulenner gant «e fri war ar gloued». E-keit-se, diouzh pezh am eus lennet er c'helaouennoù, e Nevez-York, en Amerika, ur veurgêr o vont war ziskar ha rivinet, sañset, e vez lakaet ar pellgomz en ho ti ur pemzek deiz bennak goude m'hoc'h eus graet ho koulenn.

N'eo ket em eus-me kement-se ezhomm eus ar pellgomz nemet «ki skaotet en deus aon rak dour bervet» ha peogwir on bet tapet ur wech gant diskrog-labour ar bosterien ne garfen ket bezañ div.

Lod a lavaro «Gortoz pell, gortoz gwell». Marteze ! Esperomp atav !

L.A.



... M'am befe amzer da goll e rafen un nebeut evezhiadennoù war ar yezhadurezh hag ar c'heriadurezh, evel ma vourrer ober e keaouennoù all.

A-zivout ar mennozioù avat e rin unan : ul lenner a skriv en ho niverenn 3 eo arabat kenderc'hel gant Mikael Strogoff, dav eo kemer danvez an istorioù e Breizh, en Istor Breizh.

Me a lavar eo arabat adkregit diouzh giz ar rannvroelourien da arvestiñ bamet ouzh hor begel. N'omp ket eus Ploudumañ, eus ar Bed holl ne lavaran ket (ha zoken eus ar Bed all evit lavarout ar wirionez). Breizhiz ez omp moarvat, dre m'emaomp e Breizh ; Brezhoned, e kement ha ma vevomp e brezhoneg en Istor Breizh. Met, hep ket a var, tud ez omp da gentañ, hag anatoc'h-anat keodedourien ar Bed.

Paol KALVEZ, Roazhon

KELEIER

AN NAONED

Kelaouenn vizek
embannet e Naoned

Rummad nevez

Burevioù : 79, quai
de la Fosse
44000 NANTES

Ti-moulerezh :
COPIE 22 Pedersag

Niver a skouerennoù
tennet eus an niverenn
mañ : 500

Koumanant-bloaz :
25 F (dek niverenn)

Koumanant
-skoazell : 50 F

Kregiñ a ra ar c'hou-
manantoù e penn-ken-
tañ ar bloaz

Merourez : an Itron
Gwenola
ROSSINYOL
11, rue de l'Ascension
44700 ORVAULT

Kont-bank : Niverenn
58 190 1081 - Banque
Populaire Bretagne
Atlantique - Agence
du Pont du Cens,
40, route de Rennes
44300 NANTES

CCP (hepdale)

An holl bennadoù emban-
net e-barzh KELEIER an NAO-
NED a c'hell bezañ ademban-
net e kelaouennoù all gant ma
veneger o orin. Aotre an aozer a
zo da c'houlenn evel-just evit an
holl bennadoù sinet (skrivañ da
renerzh ar gelaouenn).

... Plijet e oan bet o tegemer niverenn gentañ **Keleier an Naoned**, moulet-brav, enni tresadennoù ha luc'hskeudennoù niverus, keleier a bep seurt, ur spered nevez en embann brezhonek. Gwelout a ran siwazh ez eus gant **Keleier an Naoned** ar perzhioù fall eus kalz kelaouennoù brezhonek all. Ne zeu ket er-maez an niverennoù ingal e koulz. Kavout a reer e pep niverenn vioù-koukoug forzh pegement. N'eo ket direbech ar yezh implijet e darn vrasañ ar pennadoù. N'eus ket gant ar gelaouenn en he fezh doare ul labour graet gant tud a vicher, gant artizaned a youl vat ne lavaran ket. Displijus eo kement-se pa soñjer e vefe tu d'ober eus **Keleier an Naoned** ur gelc'hgelaouenn a zoare evit Breizhiz a vremañ. Va digarezit evit bezañ un tammig taer met n'hon eus ket ar gwir, d'am soñj, d'ober traoù dister gant ar brezhoneg. Mar fell deomp adc'hounit an dachenn c'hounezet gant ar galleg, e rankomp strivañ d'ober traoù ken brav e brezhoneg, hag an traoù a vez moulet e galleg. Talvoudegezh bras **Al Liamm** a zo embann ingal bep daou viz abaoe tregont vloaz ur gelc'hgelaouenn a zoare ha moulet kempenn-tre...

M.R.

... Me ne gav ket din tamm ebet, met **tamm ebet**, e vefe ret kemmañ talbenn ho kelaouenn. En enep, evit daou abeg da nebeutañ :

— Bez 'e tle q'r «c'heleier» chom o zemz-spered naonedat ha n'eo ket daoust da se met en askont da se ma tizho aesoc'h d'un dalvoudegezh hollvreizhat.

— A-hend-all, Naoned, Kêrbenn gozh hor bro a zo deuet da vezañ evidomp abaoe ar «partition» un arouez vroadel, hor banniel. Pep hini ac'hanomp a zo un naonedad en un doare a-benn bremañ...

... N'on tamm ebet a-enep embannidigezh danevelloù ha bandennoù treset «estren» evel Mikael Strogoff. Ret eo digeriñ hor prenestroù frank war ar bed bras. Setu hon dieubidigezh. Araok e oa ret deomp sellout ouzh Bro-C'hall ha Bro-C'hall nemetken. Bremañ e c'hellomp ober hor mad eus pep tra, dre hanterouriezh eus hor yezh evel-just. Hegaset on ivez a-benn ar fin gant koñchennoù mammoù-kozh ha distro dibaouez d'ar vuhez war-ar-maez. N'eo ket hini an amzer-vremañ.

Yann BOUESSEL du BOURG, Roazhon

Te 'oar. An embannadurioù **AL LIAMM** a embann ur bern levrioù nevez hevlene hag adembann a reont ivez levrioù n'hon eus ket du-mañ. Mall 'zo warnon d'o frenañ holl !

Ti Vatriona. Aleksandr SOLJENITSYN	20 F
Yezhadur Bras ar Brezhoneg. Fransez KERVELLA	50 F
Mari Vorgan. Roparz HEMON	22 F
Va Zammig Buhez. Jarl PRIEL	24 F
Ar Baganiz. Tangi MALMANCHE	27 F
Ar C'hazhig penn-skañv	8 F
Istor ar poñsin melen	8 F
An nadozig vurzhus	8 F

ha kalz re all...



E Bro-Naoned e vez gwerzhet levrioù brezhonek e meur a levr di, en o zouez Levr di an Itron RICHARD (42, Bd Joliot-Curie, 44200 NAONED) ; Librairie de la Cité (14, Rue d'Orléans, 44000 NAONED) ; Galeries Lafayette (18, rue du Calvaire, 44000 NAONED) ; Coop. BREIZH (9, av. du Général de Gaulle, 44500 LA BAULE), h.a...

Per KERVADEG, hervez ur pennad gant Norman WILLIAMS, rener ar gelaouenn warlene

An Dinesydd

(*dinesydd* a dalv den o vevañ en un *dinas*, kêr vras)

War-dro daou vloaz hag hanter 'zo ez eus bet un emvod gant ur strollad bihan a dud eus Kerdiz evit gwelout hag-efi e oa posubl embann keleier eus Kerdiz hag eus e rannvro. Ezhomm oa eus ur gazetenn e giz-se o vezafi ma'z eus 12 000 kembraeger e Kerdiz ha kalz oberiantiz er chapelioù, er c'hevredigezhioù, er c'hluhoù hag er skolioù. Met ne oa ket darempredoù etrezo hag alies e veze aozet traoù gant tud 'zo hep ma oufe ur bern tud hag a vije bet dedennet ganto. Setu perak eo bet divizet loc'hafi gant *An Dinesyss*.

An diviz pouezusafi er penn kentafi a oa chom hep goulenn arc'hant evit ar gazetenn evit daou abeg. An abeg kentafi a oa ne vije ket posubl gwerzhafi ar gazetenn a di da di abalamour da natur ispisial ar gevredigezh ha d'ar fed e oa kembraegerien e pep lec'h e kêr. O klask gwerzhafi e giz-se e vije bet izel-tre an dud tizhet ha ne vije bet o lenn ar gazetenn nemet ar re o dije bet c'hoant e gwirionez da zegemer anezhi. Ar pal a oa er c'hontrol tizhout ar re a chome er-maez eus an obererezhioù e kembraeg pe ar re o doa kollet darempred ganto.

An eil abeg a oa dafivezel-tre. Ma vije bet izel niver ar skouerennoù moulet e vije bet diaes dedennafi bruderezh ha fellout a rae d'ar grouerien kaout un diazez krefiv e keñver an arc'hant.

Paeet e vez neuze ar gelaouenn gant ar bruderezh e kembraeg a vez graet enni, gant harperien ha gant ur yalc'had eus kuzul an arzoù abalamour d'an traoù arzel a vez kavet e-barzh. Mod all e vez skignet ar gazetenn evit netra. 4 000 skouerenn a vez tennet bremafi e 1976.

Er penn kentafi eo bet ret d'ar renerien klask skignafi ar gazetenn dre ar chapelioù, ar c'hevredigezhioù, an tavarnioù, ar skolioù hag ar Skol-Veur. Goulennet ez eus bet digant an dud da vont da welout o mignoned a gomze kembraeg.

Met ur bec'h bras a zo bet lakaet war choug ar c'homite karget da gavout an arc'hant. Ret e oa bezañ sur e teufe an arc'hant en un doare reoliek bep vloaz e-barzh ar c'hef. Goulennet ez eus bet digant hiniannoù harpañ ar gelaouenn hag ivez digant an holl chapelioù ha kevredi-

gezhioù a c'helle bezañ dedennet. Ar respont a zo bet mat a-walc'h hag an hini gwellafi a zo bet ar skoazell roet gant kuzul an arzoù eus gevred Kembre.

An niverenn gentafi a zo bet embannet e miz Ebrel 1973 hag ur bern tud a zo bet dedennet ganti. Kudennoù a zo bet er penn kentafi gant kazetennerien pe gant moulerien met buan-tre ez eo aet mat an traoù ganto. E-pad ur mare siwazh eo bet lamet ar yalc'had gant kuzul an arzoù met evurusamant n'en deus ket digresket ar bruderezh abalamour d'ar skouerennoù skignet. Met kudennoù a vo c'hoazh en dazont hep mar ebet, dreist-holl gant koust ar moulañ o kreskiñ.

Kollet e vez bremafi war-dro 700 lur bep bloaz ha ret eo aozafi abadennoù ha traoù all evit kavout an arc'hant a vank. Ne vez ket paeet na digollet an holl re a ra war-dro ar gazetenn. Bez ez eus bremafi ur bern kembraegerien eus Kerdiz hag a zo boaz siwazh da zegemer ar gazetenn hep gwelout ar c'hudennoù arc'hant a zo da ziskoulmañ siwazh.

Gwelet e vez ivez a-wechoù tud o harpañ ar gelaouenn e-pad ur bloavezh pe zaou araok mont skuizh gant an dra-se ha dilezel pep tra. Neuze, evit bezañ sur eus dazont ar gazetenn e vo ret kemer doareoù ar vicher ha n'eo ket kontafi re war youl vat an dud. Ret e vo neuze kontafi muioc'h-mui war ar bruderezh ha krouiñ un aozadur evit harpañ ar c'hazetennoù-bro.

Evit kompren gwelloc'h afer ar c'hazetennoù-bro eo mat gouzout n'eus ket e Bro-Gembre kazetennoù pemdeziek evel *Ouest-France* da skouer. Bez ez eus ar *Western Mail* a vez lennet e kreisteiz Bro-Gembre hag an *Daily Post* a vez lennet en hanternoz hag a zo stag ouzh ur gazetenn eus Liverpool. Ne vez ket embannet keleier lec'hel gant ar c'hazetennoù-se koulz lavaret met keleier a sell ouzh ar bed (ket kalz), ouzh Breizh-Veur, Bro-Gembre pe un darn eus Bro-Gembre. A-hend-all ez eus ur bern kazetennoù lec'hel e saozneg a zeu er-maez pep sizhun met ar spered broadel n'eo ket krefiv-tre enno hag a-enep d'an emsav kembraek int kentoc'h.

Y DINESYDD

PAPUR CYMRAEG
CAERDYDD A'R CYLCH

IONAWR/CHWEFROR 1976

RHIF 27

Y Ffordd Ymlaen

Wrth i ni symud i mewn i ail fis 1976, erys un o gwestiynau llosg 1975 heb ei ateb hyd yn hyn, sef beth a fydd dyfodol addysg Gymraeg yn y brifddinas. Wedi llawer o wrthwyfegu, symudwyd Ysgol Gymraeg Bryntaf o Fynachdy i hen Ysgol Uwchradd y Merched, Y Parade, Caerdydd, cam y proffwydai Owen John Thomas (*Y Dinesydd* Gorffennaf/Awst) a fyddai "yn cael effaith arafol andwyol ar ddatblygiad addysg Gymraeg yn y Ddinas."

Mewn cyfarfod rhwng 400 o rigni Ysgol Bryntaf a Mr. Fred Adams, Cyfarwyddwr Addysg De Morgannwg ar Orffennaf 16eg, cymhellwyd y rhieni i dderbyn y syniad o symud i'r Parade fel cam dros dro. Mynegai Mr Adams ei gefnogaeth i'r syniad o sefydlu tair ysgol o fewn eithloedd llai, a gobeithiai y gallai ei adran gynnig cynllun ar gyfer sefydlu rhagor o Ysgolion Cymraeg yng Nghaerdydd o fewn chwe mis. Yn sgil sefydlu'r ysgolion cynradd newydd, teimlai y byddai'r syniad o ddefnyddio'r adeiladau yn Y Parade ar gyfer Ysgol Uwchradd Gymraeg yn dderbynol.

Calonogol dros ben. Ond beth sydd wedi digwydd ers hynny? A yw'r Adran Addysg wedi rhoi unrhyw awgrym fod cynllun pendant yn yr arfaeth, nawr fod y chwe mis wedi dod i ben? A yw rhieni Bryntaf wedi dod i dderbyn Y Parade fel cartref bodddhaol i'r ysgol yn y cyfamser? A oes perygl i ni gollir cyfle hwn drwy oedi a gohirio?

Yn oheithiol, na. Mae cynrychiolwyr y Gymdeithas Rieni i fod i gwrdd a'r Cyfarwyddwr Addysg yn ystod yr wythnos hon a mawr hyderir y daw cynigion pendant allan o'r cyfarfod hwnnw.

Yn sicr, mae'n argoelli'n dda am sefydlu Ysgol Uwchradd Gymraeg yn y dyfodol agos. Mae pwyso cynyddol ar Gyngor De Morgannwg o gyfeiriadau eraill nawr, yn ychwanegu at ymdrechion rhieni a mudiadau yng Nghaerdydd dros gael ysgol o'r fath. Mae'r dyblfiant o blant De Morgannwg dros y

ffin i Ganol Morgannwg i Ysgol Gyfun Llanharri yn peri pryder i Gyngor y sir honno, gan y gall y ffrydlif hwn olygu y bydd Llanharri yn anghonol o ran maint ymhenn blwyddyn neu ddwy. At hynny, mae Cyngor De Morgannwg ei hun y'n poeni o safbwynt ariannol: cyst oipyn mwy iddynt hwy, mewn taliadau y pen, i ddanfom plant i'w haddysgu yn nhringoeth awduddod addysg arall na phe gwneid darpariaeth ar eu cyfer o fewn lliniau eu sir eu hunain. Yr ateb rhesymegol yw troi'r Parade yn Ysgol Uwchradd Gymraeg Caerdydd cyn gynted ag sy'n bosib.

Beth am Fcynntaf wedyn? Ni ellir gorbwysleisio pwystrwyd sefydlu ysgolion cynradd newydd, llai nid gwithio Bryntaf i gorlan newydd, twy. (Ie fydd yr ysgol yn rhyw 600 o blant y flwyddyn nesaf, sefyllfa gwbl annerbiniol i ysgol gynradd.)

Yn sicr, mae yna nifer o ffactorau o blaid polisi gwsgaru. Yn gyntaf, y ffaith fod poblogaeth ysgolion cynradd Caerdydd eisoes yn crebachu, gyda mwy mwy o leoedd gwag yn cynnig

(Parhad ar dud. 4)

Cystadleuaeth y Dysgwyr

Chi'r Dysgwyr — cofiwech am y Cystadleuaeth Stori Fer, Straeon at y Golygyddi etbyn MAWRTH 7fed. Apel arbenig atoch chi atgawon dosbarth nos, Wpan ac ati: wnewch chi dynnu sylw eich disgyblion at y gystadleuaeth hon a'u hannog i gystadlu? Mae gwobrau o £10, £5, £2.50 a £1 mewn tucynnau llyfrau Cymraeg ac fe gyhoeddur y stori orau yn rhifyn mis Ebrill

NEFOEDD BILINGWAL?

Yn ddiweddar, apwyntiwyd esgob newydd i esgobaeth Llandaf a'r gw'r a ddewiswyd oedd Y Gwir Barchedig John Poole-Hughes, Cymro di-Gymraeg. Does neb yn amau cymwysterau llachar yr esgob newydd, ond er iddo dreulio bore'i oes yng nghylch Llanymddyfri, ni all siarad Cymraeg — a dyna amddifadu eglwys Dewi Sant (ac eglwysi eraill y tu allan i'r ddinas) o wasanaeth esgob Cymraeg. Dywedodd un esgob un tro mai'r Ysbryd Glân sy'n rheoli'r penodiad o esgob. Os gwir hyn, mae iaith y nefoedd mewn cryn berygl.

Deallir y bydd yr esgob newydd yn penodi esgob cynorthwyol ar ei liwt ei hun. Hyderir y bydd ei gynghorwyr yn dweud wrtho fod y gallu i siarad Cymraeg yn bwysig ar yr hen ddaear yma, beth bynnag am y nefoedd, os nad yw ambell eglwys (fel Dewi Sant) yn mynd i orfod edrych y tu allan i'r esgobaeth am wasanaethau cyflawn pan fo galw am esgob.



Y BUDDUGWYR!


Cefie Roberts ac Eirlys Britton, Aelwyd Caerdydd, cwmni i buddugol y Gystadleuaeth Ddrama a gynhaliwyd dan nawdd Cyngor Eglwys Cymraeg Caerdydd, gyda'u perfformiad o "Un Briodas" John Gwilym Jones. Enillodd Cefie 5 darian am y'r actor unigol gorau hetyd.

Er mai dim ond codi arian i Gronfa'r Elm oedd y bwriad gwreiddiol, gan ddilyn llwyddiant diarnheud y Fenter yn Theatre Bute (30 a'r 31 Ionawr, gyda chwe chwennu yn cystadlu am y darian, rhodd hael Mr Dafydd Morgan, Penarth), gobeithir ei sefydlu'n wyl flwyddol o hyn ymlaen. Bydd cyfarfod i drafod y mater nos Wener, 20fed Chwefror am 7.00p.m. yn feistri'r Tabernacl — croeso i unrhywan sydd a diddordeb.

Abaoc penn kentañ ar bloavezh-mañ eo bet divizet da gevellañ kelaouenn vrezhonek an Naoned, *Keleier an Naoned*, ha kelaouenn gembraek Kerdiz, *Y Dinesydd*. Un eskemm kelaouenn a vo graet ha marteze goude-se eskemmoù pennadoù.

Kentañ kelaouenn-vro Bro-Gembre eo *An Dinesydd*.

Petra eo ur gelaouenn-vro ? Setu pezh a zispleg *Y Gadwyn* (ar chadenn) hag a zo kelaouenn ar c'helaouennoù-bro :



BRO AN TRAOU BIHAN

Ur vro gant kulturioù lec'hel eo Bro-Gembre. Met mont a reomp bremañ davet ur sistem (reizhiad) e lec'h ma n'eus mui plas ebet evit an hengounioù lec'hel. Dre greizennadur ar sistem-mañ e vez mouget ar sevenadurioù bihan. Bevañ a reomp dindan waskerezh an traoù bras. Forzh penaos tud 'zo en hon touez a gred en traoù bihan ha pal pennañ *Y Gadwyn* (ar Chadenn) a zo brudañ ar pezh a vez graet gant ar c'helaouennoù-bro kembraek a zo bremañ. War un dro e klasko *Y Gadwyn* diskouez penaos e vez graet evit sevel ur gelaouenn-vro.

Sevel ur gelaouenn-vro n'eo ket ur mennoz nevez. Abaoe seizh vloaz ez eus bet savet war-dro 100 anezho e Bro-Saoz. Met Bro-Gembre n'he deus gwelet he hini gentañ nemet e miz Ebrel 1973 p'eo deuet er-maez *Y Dinesydd* hag en deus diskouezet deomp buhez ar gembraegerien er gêrbenn, ur vuhez a vije chomet kuzhet evidomp ma ne vije ket bet eus ar gelaouenn-se.



E miz Here 1974, eo deuet er-maez an eil gelaouenn-vro : *Papur Pawb* (*Kazetenn an Holl*), an hini gentañ en ur rannvro e lec'h ma vez komzet kembraeg. Goude-se eo deuet buan an traoù war-raok ha gwelet hon eus *Pêthe Penllyn* (*Traoù Penllyn*), *Llais Dinefwr* (*Mouezh Dinefwr*) *Llais Ardudwy* (*Mouezh Ardudwy*) ha *Lleu*, hag e miz Mezheven 1975, *Yr Ankr*.

Savet ez eus bet ar c'hazetennoù-bro e Bro-Saoz evit klemm a-enep da ziefedustred ar c'huzulioù-kêr ha departamant hag evit klask cheñch ar sistem. Disheñvel eo evit ar c'hazetennoù-bro kembraek ha diaes e vije lavarout ez int radikal pe e vez graet politikerezh enno. Gwrizennet int kentoc'h en o c'horn-bro ha klask a reont rezañ un heklek eus buhez kevredigezhel ha sevenadurel al lec'h. Kredif a ra d'an embannerien e talvez ar c'heleier lec'hel ar boan d'o c'hontañ. Diazez o menoz eo ar feiz en traoù bihan hag an dibab da wareziñ ar c'hevredigezhioù lec'hel hag o c'hembraegerezh.

Ar c'hazetennoù-se a zo ivez ur c'hammed war-raok evit reiñ buhez en-dro d'ar c'hembraeg evel beñveg kevredigezhel, ha d'an embann kembraek dre vras. Un niver bras anezho a zo savet e rannvroioù e lec'h ma ne oa ket bet kavet morse gant an dud an tu da zegemer keleier lec'hel na da zivizout diwar-benn kudennoù pouezus ar rannvro e kembraeg, daoust d'an darn vrasañ implijout ar c'hembraeg evel o yezh bemdeziek. Diaes eo gouzout ez resis peseurt berzh a ra hiziv an taol-arnod-se met n'eus ket tu da nac'h ez int bet degemeret mat-tre betek-henn hag arouezius eo gwelout penaos e vezont gwerzhet. Betek-henn ez eus bet gwerzhet muioc'h evit 13 000 skouerenn anezho bep miz ha jedet hon eus e oa war-dro 40 000 lenner ganto. E meur a lec'h eo aet ar werzh war greskif e-pad ar mizioù diwezhañ-mañ pezh a zo kalonekaüs-tre evit an embannerien e-keñver an amzer da zont.

Na lezomp ket ober ac'hanomp tachennoù arnodin

Hervez dekred ar 15 a viz Ebrel 1912, ez eo difennet lakaat dañveziou kimiek er boued pe en evaj. Talvezout a ra an dekred-se atav ha koulskoude...

Er broioù ma vevomp enno, n'eo ket dre ziouer a voued e sav kudennoù, dre ar saotradur hag an dañveziou a vez lakaet, ne lavaromp ket. Anat eo e vevezomp muioc'h dañveziou a bep seurt evit livañ. mirout pe reñf blaz d'ar boued.

Perzhioù mat kentañ ar boued a zo bezañ dinoazus, ha magus. Kentañ tra d'ober eta, eo lennel dioutañ pep dañvez a c'hellfe bezañ pistrus ha dañjerus evit ar yec'hed. N'eus abeg ebet evit ma vefe daou seurt boued : unan evit an holl, marc'hadmatoc'h peogwir e vez lakaet ennañ bep seurt traoù hag unan all muioc'h naturel, prientet gant evezh, evit un dibab a dud, dre ma'z eo keroc'h. Pep hini ac'hanomp en deus ar gwir da chom yac'h ha da c'houzout petra a zebr bemdez.

PETRA A ZEBROMP

Debrñf a reomp kalz a zañveziou kevanaozet, livet, falset ha divlaz, da skouer pechez e siros tennet o flusk gant soud, piz bihan livet e gwer, morzhed-oc'h gant nitrat pe fosfat, gwin hep rezin, pe sun oranjez hep oranjez, viou dozvet gant yer louzaouet, koaven kimiek, hag all... Bez e c'hellfec'h menegif ouzhpenn an doare ma vez louzaouet al loened hag ar gwez, gant petra e vez graet ar bara. miret al laezh pe an amann. An deiz a hiziv ez eo bet boazet an dud da gavout boued kinniget mat. en em zalc'h mat, frouezh luf, legumaj naet, viou tev. Disofijet o deus n'eo ket gwer ar vent. n'eo ket gwenn ar bara, ha frouezh kutuilhet pell amzer a-wechoù araok degouezhet war ar marc'had ne c'hellont ket mirout un neuz fresk. Ret eo bezañ war evezh eta. **BOUED RE ZEDENNUS A VEZ ALIES NANN NATUREL.**

PETRA A C'HELLOMP OBER


Meur a gevredigezh o deus goulennet ma vefe difennet ouzh an embregerezhioù boued implijout dañveziou kimiek. Lod o deus goulennet zoken ma vefe distrujet ar stokoù diouzhtu.

Abaoe 1970, e c'houlenn *Kevredigezh ar Yec'hed er Bed* ma vefe studiet donoc'h seurt dañveziou. E gwirionez, nebeut a dra a vez graet ha lod eus ar studioù a chom kuzh.

Dirak dizamanted ar mererezh-stad dirak seurt kudenn, e tle ar vezezerien en em zifenn o-unan.

Diaes eo hiziv chom hep bevezñ boued hep dañveziou kimiek. Evit en em zifenn e lavar an aozerien boued e reont hervez c'hoantoù an dud. Ret eo diskouez n'eo ket gwir. Niverusoc'h niverusañ e vez an dud o c'houlenn boued naturel ha diaes-tre eo e gavout (nemet d'ur priz uhel-tre). Evit diskouez n'hon eus c'hoant ebet e vefemp implijet evit taolioù-arnod, nac'homp prenañ madigoù, siros, kilhevardon, h.a., lec'h ma kaver ar muiañ a zañveziou kimiek.

Setu amañ da heul ur roll bihan a servijo deoc'h evit ober ar marc'had, evit skoazellañ ac'hanoc'h da zibab boued ar muiañ naturel, ha kompren un tammig trefodaj al lizherennoù hag ar sifroù merket war ar boestoù.



An dañvezioù livañ da heul a vo difennet dre ar c'henvarc'had adalek ar lañ a viz Genver 1977.
Nac'hit anezho adalek bremañ :

- E 103 (melen)
- E 105 (melen)
- E 111 (oranjez) Kavet dreist-holl er madigoù, siros, koavennoù, koavennoù skornet, gwestilli,
- E 121 (ruz) kroc'hen keuz, kroc'hen kilhevardon, kaotigell, amann, druzoni.
- E 125 (ruz)
- E 126 (ruz)
- E 130 (glas)
- E 152 (du)
- E 181 (gel teñvel)

Dañvezioù livañ arvarus

- Z 104 (melen)
- E 120 (ruz)
- E 120 (ruz)
- E 123 (ruz) Kavet e vezont en hevelep seurt boued.
- E 124 (ruz)



Lizherennoù merket war ar boestoù **boued skornet** o deus an hevelep talvoudegezh ha re ar boestoù-mir.

Evit an dañvezioù enporzhiet avat, e c'hell bezañ merket hervez reolennoù ar vro orin !

Da c'hortoz ma vo merket splann an deiziadoù war ar boestoù mir, pe ez asantfe ar genwerzhourien displegañ an droïdigezh en o stalioù, greomp holl hor marc'had gant ur c'harnedig notennoù !


Meur a gentel a c'hellomp tennañ eus kement-se :

— Da gentañ, debromp ar muiañ posubl traoù graet er gêr. Traoù a zo hir pe diaes d'ober, traoù all avat a c'hell bezañ graet gant nebeut a boan, evel gwastilli, yaourt...

— D'an eil, klaskomp debrñ boued naturel. Gwelloc'h prenañ boued gwerzhet war ar marc'had lec'h ma teu tud diwar-ar-maez da ginnig un nebeut vioù, un nebeut lurioù amann, frouezh ha legumaj gounezet ganto en o liorzhoù pe o atantoù bihan tro-dro d'ar gêr. N'eo ket keroc'h ha blaz ar fresk a vez ganto.

— Arabat disoñjal emañ Breizh lec'hiet mat evit kalz a draoù : ar pesked, kalz a legumaj, amann, kilhevardon, hep disoñjal ar gwastilli sec'h graet e meur a lec'h. Perak prenañ traoù graet e lec'h all pa'z eo diaes kavout traoù gwelloc'h eget traoù graet er vro ?

Berc'hed




Ar Bezhin

Ar bezhin, pe goumon pe c'hoazh felu, a zo ur blantenn a gaver dreist-holl war an aodoù. Evit an niver brasañ eus an dud n'ez eus diforc'h ebet etre ar seurtoù bezhin ha ne ouzont ket gwall vat ar pezh a c'heller ober pe ar pezh a vo tu d'ober gantañ, koulz evit ar medisinerezh hag evit ar boued.

Ment ar bezhin a c'hell bezañ bihan-bihan (gwelus hepken d'ar werenn-greskiñ) pe bras-tre, betek muioc'h eget 100 metrad hirder, en Aostralia hag en Amerika. Hervez al liv e vez meneget ar bezhin : gwer, gell, ruz ha glas. Ezhomm en deus gouloù evit bevañ ha setu perak ne gaver bezhin ebet dindan 25 metrad a zonder.


Kavet e vez ar blantenn-se war dost holl aodoù ar bed, met dreist-holl e lec'h ma'z eus kerreg evit en em stagañ outo, pe war ar vrienn, pe en donvor. E Breizh, al lodenn baourañ a zo Bro-Naoned ha tro-war-dro rak an aod n'eo ket gwall roc'hellek eno.



Ar seurt bezhin o deus anvioù latin hag ivez anvioù e yezh ar vro. Penaos e vezont anvet e Breizh ? Al '*Laminaria*' a reer anezhi **kalkud**, **melkern**, pe **bodre** ; ar '*chondrus crispus*' a zo evidomp an **tellesk**, ar '*fucus*' pe '*varech*' a zo ar **bezhin-bos** hag an '*ulva lactuca*' a reer anezhi **letuzenn-vor**. Setu evit ar seurtoù boutinañ a gaver war aodoù Breizh.

Hervez al lec'h m'en em gav, e toug ar bezhin ivez anvioù disheñvel : an hini a vez dastumet war an aod a vez anvet **bezhin-med**, an hini a vez kaset gant ar mor war an traezh a zo **bezhin-rasklenn** pe **bezhin-tonn** pa vez kaset a-bell. Ar bezhin a vez devet a zo **bezhin-tan**, an hini a vez kaset war an aod da vare ur gorventenn a zo **bezhin-torr** hag an hini da vezañ troc'het er mor a zo **bezhin-troc'h**.

Boazhioù a oa gwechall e Breizh evit kutuilh ar bezhin. UI lod eus ar bloaz a veze anvet '**bezhinad**' ha mont a rae ar vezhinaerien da vezhinañ er mare-se. Eus ar **bezhin-troc'h** en deveze pep hini e lod, koulz ar c'hrouadur en e gavell hag an tad pe ar vamm-gozh. Ar re n'o doa ket c'hoant da droc'hañ o bezhin a werzhe o lodennoù d'ar re all. Troc'het e veze ar bezhin e-pad an deiz, eus kreiz miz C'hwevrer betek ar 24 a viz Mezheven. Eus ar **bezhin-rasklenn** lezet gant ar mor war an aod, o doa an holl wazed o lod, ar baotred p'o doa graet o fask kentañ : ar merc'hed avat n'o doa lodenn ebet. Dont a raent da sikour o gwazed da zastum o lodennoù.



Kalkud

Letuzenn-vor

Bezhin-bos

Ar fel u-se a veze implijet e Breizh evit lakaat war an douar evel temz, ivez evit leuniañ matarasennoù e lec'h pluñv pe, ha kement-mañ betek an XVIII^{vet} kantved, evit ober kali. Graet e veze toullou en erin, 5 pe 10 metrad hirder, 60 kantved-metrad ledander ha 40 kantvedmetrad donder, ha devet e veze enno ar bezhin evit kaout ur seurt yod gludennek anvet *kali-bezhin*.

Araok ar brezel-bed kentañ e veze dastumet bezhin adalek an Trev betek Gwened. Bez e oa 18 labouradeg ha 3 000 a labourer en ijinerezh-se.

War-dro 1930 e oa 4 000 bezhinier, bremañ ne chom mui nemet war-dro 500 anezho ha kavet e vezont etre Kastell-Paol hag an Aber Benead hag etre Lambaol ha Konk-Leon hag ivez e Gwaien, e Penmarc'h hag e Konk-Kernev. E departamant Penn-ar-Bed, eizh bloaz 'zo, e oa 8 labouradeg a implije 200 den. Da grediñ e oa neuze ez afe an niver-se war greskiñ abalamour d'an implijoù nevez bet kavet evit ar bezhin. Met siwazh, hiziv, an holl labouradegoù-se a zo bet serret. Boas omp e Breizh da welout traoù a seurt-se !

Ar bezhin-mor a servij ivez evel teilh. Mat-tre eo evit an douar, derc'hel a ra ar glebor, ne zegas amprevan fall ebet ha reifi a ra nitr ha fosfat. Ar maerl hag a zo ur berniad bezin-ruz razek, a vez ravellet er mor e Breizh evit temzañ an douaroù paour e raz. E Breizh hag e mur a vro all e vez mesklet bezhin gant an douar.

Implijet e vez ivez ar goumon er medisinerzh. Tra ma oa anavezet madoberoù an dour-mor abaoe pell (da vare Platon zoken), n'eo bet dizoloet perzhioù mat ar felu nemet kalz diwezhatoc'h. Er bezhin e kaver iod, mat evit krefvaat hag habaskaat ar c'horf, evit mirout ouzh ar gwad da galediñ, evit lazhañ ar bazhennigoù, evit louzaouiñ al loened ha zoken evit ober koavennoù da lakaat an dud da dreutaat. Implijet e vez hiziv ar bezhin e-barzh ouzhpenn 50 kenderc'had apotikerezhel.

A-benn un nebeut bloavezhioù ne vo mui plas a-walc'h war ar maezioù evit lakaat da greskiñ al legumajoù da vagañ holl dud ar blanedenn. Setu perak e klasker implij ar bezhin evel bouetaj. Ar felu a zo yac'hus-tre rak kavout a raer ennañ traoù mat da vagañ mabden : an iod, ar barium, ar manganez ha vitaminoù a bouez. Al letuzenn-vor a zo pinvidik-tre e-keñver vitaminoù A, seurtoù all o deus kement a vitaminoù C hag an orañjez. E Bro-Japan, en Hawai, e China e vez implijet ar felu abaoe milvedoù, ha gantañ e vez graet kaotigell, yod, hiliennoù a bep seurt. Debret e vez kriz pe poazhet evel ul legumaj, dioutañ e vez tennet ur seurt te, «*kombu*» e anv. Er Stadoù-Unanet hag e broioù 'zo eus Europa e kaver bleud bezhin. E Breizh, da vareoù a zienez, e veze debret ur seurt bezhin dindan-stumm ur yod... Ijinerezh ar c'hoavennoù skornet a implij kalz bezhin. Gantañ e vez graet koazhadur-kig ha diennoù met un tammig fae a reer c'hoazh en Europa war ar seurt bouetaj. Hogen n'eo ket ware'hoazh e vo implijet ar felu evel bouetaj boutin ha pemdeziek rak, ma'z eo un dafvez pinvidik, ne c'hell ket bezañ gouzafvet gwall vat gant ar benvegad-goñf. 100 gram evit un devezh a zo ar muiañ. Eno emañ an dalc'h !

Gallout a reer menegiñ c'hoazh an implij a reer gant ar bezhin en ijinerezh 'zo, er gimiezh da skouer. Erfin e tlefe mont hor devosion davet ur vezhinenn c'hlas rak sellet e vez outi gant tud 'zo evel hon hendad ar gwellañ anavezet hag evel hor warlerc'hiad ar surañ !


Ar saverezh-listri e Bro-Naoned

Un ijinerezh pouezus eo hiziv ar saverezh-listri e Breizh ha reñf a ra labour da dost da 20 000 Breizhad (hep kontañ ar bourchaserien-dafar hag an is-kevraterien). Kavout a reer chanterioù-etre e Sant-Malo hag en Oriant, arsanailhoù ar morlu gall e Brest, en Endr hag en Oriant, chanterioù-adaozañ listri e Sant-Nazer hag e Brest, chanterioù bihan diniver hag a ra bigi-pesketañ ha bigi-plijadur a-hed aodoù Breizh ha daou chanter bras dreist-holl, ar **chanterioù DUBIGEON-NORMANIE** en Naoned ha **chanterioù an Atlantel** e Sant-Nazer, ar re-mañ o vezañ e-touez ar re vrasañ er bed, gant re Japan, Sveden hag Alamagn.


Un hengoun kozh

Kozh-tre eo ar saverezh-listri en hor bro. Bez e oa anezhañ dija er IV^{vet} kantved araok H.S. hervez testeni PYTHEAS, ur beajour foseat (Fose a oa ur porzh bet krouet gant ar C'hresianed er Mor Kreizdouarel e lec'h m'emañ Marseilh hiziv). Kontañ a reas PYTHEAS en e zanevell-beaj penaos en doa gweladennet ur porzh bras war aber al Liger, Corbilo e anv, ha gwelet ennañ ur bern chanterioù-listri.

Tri c'hantved war-lerc'h, n'eus ket mui anv eus Corbilo met kavout a reer e lec'h m'emañ kêr an Naoned hiziv, ur meuriad galian, an Namnediz, hag a vo lakaet gant Julius Caesar da sevel galeoù a dalvezo dezhañ da drec'hif ar Venediz...



Al lestr Batillus e chanter Sant-Nazer. Gant Krupp eo bet graet ar pont-ruilh ramzel-se. Gouest eo da zibradañ tammoù-lestr 750 tonenn o fouez !



NOTENN :
 Unan eus ar baleadennoù pijusañ ha dudiusañ a c'heller ober e Breizh hiziv a zo mont eus Sant-Nazer da Sant-Brewen dre ar pont nevez war aber al Liger. Ker-ruz eo ar gwir-treizh evit ar c'hirri (ur vezh !) met d'an dud war droad ne goust netra. Eus ur c'harz ne weler netra hag e tremen re vuan, forzh penaos, war droad avat, e tizoler ur gweledva sebezus. Ret eo kontañ tri c'hard-eur evit mont eus ur penn d'egile met tu a zo d'ober an hanter eus an hent hepken rak e-kreiz ar pont, el lodenn uhelañ, ez eus ur gwel dispar war Bempo, Menzin, Sant-Brewen, beg Sant-Gweltaz, aber al Liger gant listri ha bigi o tont hag o vont, porzh Sant-Nazer. **Chanterioù an Atlantel** (a weler en traoñ evel diouzh ur c'harr-nij) ha pelloc'h, er reter, purerezh Donz ha tachenn c'hreantel bras Moustier-Naoned. Emañ an eoullstr **BATILLUS** o vont kuit en deiziou-mañ met diouzh ar pont e c'heller gwelout mat-tre e vreur gevell, **BELLAMAYA** (550 000 t ivez !), war ar stern evit meur a sizhunvezh c'hoazh.

- 1 - Follennoù-houarn
- 2 - Treustoù-houarn
- 3 - Labouradeg-ditroc'hañ ar follennoù-houarn
- 4 - Labouradeg-troc'hañ an treustoù-houarn
- 5 - Labouradeg oberiañ ar follennoù-houarn bras
- 6 - Labouradeg stummañ ar follennoù-houarn
- 7 - Labouradeg-ragaozañ pezhioù etre (betek 30 t)
- 8 - Labouradeg-ragaozañ pezhioù pounner (betek 120 t)
- 9 - Labouradeg-ragaozañ pezhioù pounner (betek 180 t)
- 10 - Labouradeg-ragaozañ panelloù bras (betek 240 t)
- 11 - Labouradeg-strollañ pezhioù bras
- 12 - Livadurezh
- 13 - Poull 45 x 350 m evit listri etre
- 14 - Poull 70 x 900 m evit listri bras (eoullistri betek 500 000 t)
- 15 - Leurenn-strollañ ar pezhioù bras
- 16 - Pont-ruilh 250 t (leurenn-strollañ)
- 17 - Pont-ruilh 750 t
- 18 - Pont-ruilh 250 t
- 19 - Poull 95 x 450 m (eoullistri betek ur milion tonneñ !)
- 20 - Kae-paramantif Nn 1
- 21 - Kae-paramantif Nn 2
- 22 - Reñerezhañ ha burevioù

**Chanterioù
an Atlantel**



Porzh-pesketañ
**LENNBORZH
SANT-NAZER**
 Bon-brezel ar
 Splujerezed Alamañ

Etre an XII^{vet} hag ar XVI^{vet} kantved e vez brudet bras chanterioù an Naoned. Ur vro dieub e oa Breizh neuze, Naoned he c'hêrbenn. Merdeadurezh Breizh a voe e-pad ur pennad e-touez ar re gentañ en Europa ha bigi Breizh a zaremprede porzhioù Portugal, Bro-Skos, Holland ha broioù ar Mor Baltek (evel maz eo bet diskouezet splann gant levr an Ao. TOUCHARD diwar-benn merdeadurezh Vreizh e dibenn ar Grennamzer).

Ul lañs nevez a voe roet d'ar verdeadurezh e Breizh en XVIII^{vet} kantved gant ar c'henwerzh gant Amerika (Antilhez dreist-holl), Afrika hag Azia (ar morianataerezh a yae d'ober darn eus ar c'henwerzh-mañ). Ur berzh bras a anavezaz neuze porzhioù evel Brest, Sant-Malo, An Oriant ha dreist-holl an Naoned (1 332 lestr marilhet en Naoned war-dro 1750 ha 2 558 e 1770 !). Evit bastañ da ezhommoù ar baramantourien e voe krouet ur bern chanterioù etre an Naoned hag ar mor d'ar mare-se. E 1740 da skouer e savas ur c'halvez, e anv Juluan DUBIGEON, e lestr kentañ en Naoned. Krouet e voe ar «chanter DUBIGEON» evit mat e 1745.



Aros al lestr Batillus gant e zaou stur hag e ziv viñs-tro. Merkit ment ar vicherourien en o c'heñver l

E-kreiz an XIX^{vet} kantved ne oa c'hoazh Sant-Nazer nemet ur porzh-pesketa bihan, ennañ 3 000 annezad. Divizet e voe ober anezhañ ur porzh-kenwerzh bras e 1856 gant ur vorlinenn o vont da Amerika. E 1861, e tivizas ar c'hevredad gall «**Compagnie Générale Transatlantique**» (*Kompagnunezh Hollek Treuzatlantel*) diazezañ eno chanterioù evit sevel e listri. Dibabet e voe ul lec'h anvet «Penhoët» (penn ar c'hoad) ha degaset e voe ijinourien ha kalvezourien skosat eus ar chanter SCOTT e Greenock (e-kichen Glasgow war aber ar stêr g-Clyde) evit deskifi o micher da baotred ar Vrier. Porzh Sant-Nazer a yelas war greskifi buan ha krouet e voe ur chanter all e 1882, **Chanterioù al Liger**. E 1900 e teuas Chanter Penhoët da vezañ ur c'hevredad dre lodennoù. Gantañ e voe savet ur bern listri, en o zouez ar mordreizher «Normandie» (83 500 tonell) e 1935. (Ar mordreizher «Normandie» a oa neuze al lestr brasañ ha buanañ er bed met ne badas ket pell rak diskaret e voe gant un tangwall e porzh New-York e 1942). Etre 1940 ha 1945 e voe diskaret penn-da-benn chanterioù Sant-Nazer ha re an Naoned gant ar bombezadegoù amerikad ha saoz met adsavet e voent etre 1945 ha 1947, hag e 1950 e voe moret e Sant-Nazer ar mordreizher «Liberté» (52 000 tonell).

Enkadenn ar bloavezhioù 50

E 1950, e oa war-dro 20 000 den o labourat e chanterioù Bro-Naoned (26 000 gant an iskevraterien) :

Chanter DUBIGEON (Naoned)	1 200 den 5 stern
Chanterioù al Liger (Naoned)	2 600 den 4 stern
Labouradegoù ha Chanterioù Breizh (Naoned)	3 500 den 3 stern
Kompagnunezh an Naoned evit adaozañ listri (Naoned)	300 den 4 radell-aozañ listri
Labouradegoù ha govelioù ar C'hornog (Sant-Nazer)	500 den
Chanterioù al Liger (Sant-Nazer)	3 980 den 2 stern
Chanterioù Sant-Nazer (Penhoët)	7 500 den 5 stern

Labour a oa bet evit an holl embregerezhioù-mañ er bloavezhioù o doa heuliet ar brezel met ne oa ket mui labour awalc'h evit an holl war-dro 1954-1955. Ouzhpenn-se ne oa bet degaset araokadenn galvezel ebet er chanterioù ha warlerc'hiet e oant deuet da vezañ e-keñver re Sveden da skouer. Nec'het e oa an holl e Bro-Naoned rak er-maez eus ar chanterioù (hag eus un nebeut labouradegoù bouestoù-mir ha gwispid) ne oa labour ebet evit ar vicherourien, dreist-holl e kêr Sant-Nazer. An hini a golle e blas a ranke divroañ. Bez e voe harzoù-labour bras, dibunadegoù niverus ha krogadoù feuls gant ar bolis (kement-mañ a zo bet kontet mat el levr galleg «*Les Prolos*» gant an Ao. OURY). Spontet e voe gouarnamant Paris ha kas a reas miliadoù a archerien da Naoned ha Sant-Nazer. A-drugarez d'ar stourm taer-mañ ne voe ket lezet ar chanterioù da vont war ziskar ha roet e voe dezho ur skoazell vras. Ret e oa dezho avat en em nevesaat ha gwellaat kalz o c'henderc'husted. E 1955 e voe kendeuzet Chanterioù Sant-Nazer (Penhoët) ha Chanterioù al Liger (re Sant-Nazer) evit mont da ober Chanterioù an Atlantel. Etre 1963 ha 1968 e voe kreizennet d'o zro chanterioù an Naoned. Kendeuzet e voe chanterioù DUBIGEON gant Chanterioù al Liger (re an Naoned), gant chanterioù e Normandia ha gant chanter ar c'hevredad «Labouradegoù ha Chanterioù Breizh» a baouezas da sevel listri diwar-neuze.

Ur pouez a chom bras en armerzh ar vro

Hiziv ne chom mui nemet tri c'hevredad bras o plediñ gant ar saverezh-listri e Bro-Naoned (daou zoken rak an trede ne sav nemet listri bihan hag a ra dreist-holl war-dro adaozañ listri) :

- Chanterioù DUBIGEON-NORMANDIE (Naoned) : 2 500 den 3 stern
- Chanterioù an Atlantel (Sant-Nazer) : 7 500 den (gwelout ar gartenn)
- Labouradegoù Gall ar C'hornog (Sant-Nazer) : 700 den (ha 700 all e Brest)

N'eus mui nemet war-dro 10 000 den o labourat er chanterioù hiziv e Bro-Naoned met kalz muioc'h a labour e doare pe zoare evit ar saverezh-listri

Da heul ar bloavezhioù 50 o deus an holl embregerezhioù-mañ anavezet ur vleufvidigezh wirion. E 1952, e oa bet an eoullistri BETHSABEE ha BERENICE, moret e Sant-Nazer, ar re vrasañ er bed (32 000 t). Ur bern eoullistri all brasoc'h-brasañ a zo bet savet e Sant-Nazer abaoe, an hini diwezhañ o vezañ ar BATILLUS (550 000 t !) emeur o paouez morañ. Ar mordreizher diwezhañ savet e Breizh a voe ar «FRANCE» (65 000 t) e Sant-Nazer e 1962 (ha chomet dizilplij abaoe 1975). Un arbennigouriezh nevez o deus kavet chanterioù Sant-Nazer o sevel listri-metaner abaoe 1968-1969. Ar Chanterioù DUBIGEON o deus graet ur bern mordreizherioù bihan hag etre (gouest da zegemer kirri-tan ha kirri-samm), listri-samm hag un nebeut splujerezed. Labour a zo bet dalc'hmat er chanterioù betek an deizioù-mañ.

Un enkadenn nevez o kregiñ

E gwirionez n'eo ket mat stad ar saverezh-listri hiziv. Da heul an enkadenn armerzhel er bed en deus digresket kalz ar c'henwerzh etrevroadel hag an eskemmoù war vor. Ur bern listri a chom dizimplij hag evel-just ne vez ket roet kalz urzhiadoù nevez d'ar chanterioù. Kalz urzhiadoù a zo bet torret zoken, o vezañ ma kave gwelloc'h ar baramantourien reiñ un digoll bras d'ar chanterioù eget en em gavout gant ul lestr didalvoud diwezhatoc'h. N'eus ket mui labour a-walc'h evit an holl chanterioù dre ar bed ha, nemet ma trofe an traoù buan-tre en un doare dic'hortoz, ez eo tonket ur bern chanterioù da vont da get. Evit klask dreistbevañ emañ chanterioù 'zo, er reter pellañ dreist-holl, o tiskenn kalz o frizioù : un eoullestr hag a gouste 300 000 F daou vloaz 'zo, a vez gwerzhet hiziv 40 % pe 50 % marc'hadmatoc'h. Ur bern broioù o deus krouet chanterioù d'o zro abaoe un nebeut bloavezhioù (Spagn, Brazil, Perou, Gres, Polonia, Su-Korea) ha gouest int da ginnig prizioù kalz izeloc'h, evit listri boutin, dre ma chom, izel goprou o micherourien (en eneb ez eo micherourien ar chanterioù e Bro-Naoned e-touez ar vicherourien ganto ar gopr uhelañ e Breizh).

Spontus e vo an enkadenn a zo o kregiñ, goude ugent vloaz a vleufvidigezh. E **Japan e oa** 25 chanter bras e 1955 ha bez ez eus 50 anezho hiziv : 23 eus ar re-mañ a zo gouest da sevel listri-bras. E korf 15 vloaz eo bet lieskementet dre 10 o c'henderc'h. Tremenet eo lod Japan er marc'had-bed eus 22 % da ouzhpenn 50 %. N'eo ket souezhus eta e vo Japan unan eus ar broioù a zo vont da c'houzañv ar muiañ peogwir e ra ouzhpenn an hanter eus listri ar voull-douar. Tonket eo ur bern chanterioù japanat da vont da get, ha, da c'hortoz, e kemerint urzhiadoù da forzh petore priz o kas chanterioù all d'ar freuzstal. E Bro-Sveden, da skouer, hag a zo bet e-pad pell amzer an eil bro er bed evit ar saverezh-listri, ne chomo mui nemet ur chanter bras a-benn nebeut. Evit Svediz ez eo ar saverezh-listri un ijinerezh evit ar broioù isdiorreet dreist-holl. En arvar bras emañ ivez chanterioù Bro-Ulad ha Bro-Skos...

Komzet ez eus bet kalz e Breizh eus chanterioù Sant-Malo (SICCNA) e-lec'h m'en em gav dilabour 350 den abaoe ur bloaz. Nec'het eo tud an arsanailhoù peogwir ar gouarnamant gall en deus gorrekaet e steufiv evit nevesaat ar morlu. Nec'het e vezer dreist-holl gant ar **Chanterioù DUBIGEON-NORMANDIE** en Naoned rak n'o deus mui degemeret urzhiad ebet abaoe 1975 ha goullo e chomo unan eus o zri stern adalek miz Gwengolo 1976. Abaoe meur a vizvezh ne engouestlont mui den ebet. Ne roont mui labour ebet en diavaez (da iskevraterien) hag anv a zo zoken da zic'hoprañ 200 pe 300 den araok dibenn ar bloaz. Chom a ra da ober 5 lestr-samm evit ar paramantour norvegiat Jacob Stolt NIELSEN ha div splujerez evit Su-Afrika ha goude-se ne vo mui netra da ober. Ouzhpenn-se n'eo ket aes sevel listri arnevez war ur stêr, pell diouzh ar mor, e kreiz-kêr koulz lavaret. N'eus ket tu da sevel listri hiroc'h eget 200 m er **chanterioù DUBIGEON** ha pep moridigezh a zo un abadenn diaes. Hervez tud 'zo e vefent kendaonet da vont da get a-benn un nebeut bloavezhioù...

Disheñvel-tre eo an traoù evit **Chanterioù an Atlantel**. Kalz plas o deus e-keñver ar chanterioù all er bed ha gouest int d'en em astenn c'hoazh dre c'hounit tachenn war ar mor evel m'o deus graet dija meur a wech. Gwellaet o deus kalz o doareoù-labourat abaoe ugent vloaz met gouest int da uhelaat c'hoazh ar genderc'husted ha da gevezañ gant chanterioù all dre ar bed. E dibenn 1975 o doa war o c'haier-urzhiadoù :


- 10 eoullestr (en o zouez pevar eus 550 000 t)
- 4 lestr-metaner
- 8 lestr doug-endalc'herioù

Labour o deus eta betek miz Genver 1982 pezh n'eo ket fall (n'eus ket kalz chanterioù a c'hell lavarout kement-mañ hiziv). Prenet o deus digant ar gouarnamant gall (hag en deus graet ganto evit e splujerezed derc'hanel) ar breoù evit kefluskerioù derc'hanel ha gouest e vint a-benn un nebeut bloavezhioù da sevel listri-samm gant kefluskerioù derc'hanel. Gouest int ivez da sevel labouradegoù war neñv. Divizet o deus warlene da zont en-dro ivez d'al listri keitat diouzh ret, pezh ne raent ket abaoe dek vloaz. Peogwir o deus kalz plas e c'hellint sevel seurt listri buan-tre, ouzh ar stlej, kalz marc'had-matoc'h eget ar **Chanterioù DUBIGEON-NORMANDIE** da skouer. Krefiv eo **Chanterioù an Atlantel** ivez peogwir e reont en ul labouradeg all, e Mouster-Naoned, kefluskerioù ramzel hag a servij evit stlejerezed, listri bras ha tredanvaou. Ar c'heflusker PC 4 da skouer a zo e c'halloud brasañ 27 000 CV, pemp skouerenn anezhañ a-gevret a dalv kement hag un dredanva 100 milion Watt ! Peogwir e vezont implijet kalz er-maez eus ar verdeadurezh, n'eo ket stag kenderc'h ar c'hefluskerioù-mañ ouzh ar saverezh-listri. Gwelloc'h e seblant bezañ an amzer da zont eta evit chanterioù Sant-Nazer.

Lorc'h a c'hell bezañ ennomp o soñjal ez eo bet savet eoullistri brasañ ar bed e Breizh gant micherourien vreizhat. Arabat deomp en em douellañ avat. N'eus nemet al lec'h hag ar vicherourien hag a zo breizhat, an arc'hant hag ar galloud n'int ket. Perc'hennet eo chanterioù an Naoned ha chanterioù Sant-Nazer gant kevredadoù bras ha bankoù eus Paris. E Paris emañ ar renerien o chom. N'eo ket breizhat an darn vrasañ eus an ijinourien. Ne vefe marteze chomet chanter ebet hep skoazell ar Stad da heul stourm ar vicherourien er bloavezhioù 50 evit difenn o zamm bara.

Embannet eo bet nevez 'zo ar c'heloù eus kendeuzidigezh **Chanterioù an Atlantel** gant C.G.E. **ALSTHOM** unan eus ar c'hevredadoù greantel brasañ e Bro-C'hall. Diaes eo gouzout petra a zeuio diwar an dra-se met ret eo d'ar Vreizhiz chom war evezh.

Doktor Sklerijenn



Ma'z it da OUAGADOUGOU, kêrbenn VOLTA-UHEL, en AFRIKA, war blakenn ur straed hir e lennoc'h «*rue du Docteur GOARNISSON*», ha c'hwi a zesko ivez ez eo aŋvet skol ar Stad evit ar glañvdiourien hag ar c'hlañvdiourezed «*Skol an Doktor GOARNISSON*». Un anv breizhek, sur a-walc'h un dilerc'hiadenn bennak ankouaet abaoe amzer ar golonialisted. Tamm ebet, peogwir eo d'ar 24 a viz Meurzh 1973 eo bet «badezet» ar skol gant ur ministr hag ar straed gant maer ar gêrbenn en enor d'ur medisin kozh en doa asantet dont da gemer perzh el lidou.

Piv eo eta ar medisin-se ?

Yann-Loeiz GOARNISSON a zo bet ganet er FOUILHEZ, e Kerne Uhel, d'an 12 a viz Eost 1897 hag emañ oc'h echuif e vuhez e kloerdi bihan PABRE, tost da OUAGADOUGOU. Rak mar deo Yann-Loeiz GOARNISSON ur medisin brudet en AFRIKA, ur beleg eo ivez.

Emañ c'hoazh e skolaj KASTELL-PAOL pa rank mont da soudard e miz Genver 1916. Emeur e kreiz ar brezel-bed kentañ. Kaset eo buan war an talbenn. Emañ emgann vrudet ar «*CHEMIN DES DAMES*» o kregif. Levezon an amzerioù kriz-se a vount anezhañ d'en em lakaat e servij ar re all.

Disoudardet e 1919, e tremen e vachelouriezh ha kregif a ra gant studioù a vedisinerezh e Roazhon. Met soñjal a ra dija mont da veleg en urzh an Tadoù Gwenn, misionerien en AFRIKA. D'ar mare-se n'eus ket tu da echuif e Breizh studioù a vedisinerezh. Divizout a ra eta mont da v-MONTPELHER.

Gounezet gantañ e zoktorelezh e geñver 1924, e ya kuit buan da ALJER da gloerdi an Tadoù Gwenn, hep gwelout e dud. Rak ne blij ket dezho menoz o mab.

Tremen a raio 6 bloaz e kloerdi an Tadoù Gwenn en ALJERIA hag e TUNIZIA. Beleget e Mezheven 1930, ez eo aŋvet da OUAGADOUGOU.

Met fellout a ra dezhañ, araok mont di, studiañ ar c'hlañvedoù trovanel hag evit-se e ya da Skol-Veur ar Vedisinerezh e PARIS. Goude c'hoazh e tistro da ALJER evit studiañ kleñvedoù an daoulagad.

Kemer a ra a-benn ar fin hent VOLTA UHEL hag en OUAGADOUGOU en em gavo d'ar 24 a viz Meurzh 1931. Er vro-se emañ atav ha rouez kenañ ar vakfisoù en deus kemeret er-maez eus ar vro.

Kentañ tra d'ober, deskif yezh an dud, ar moreg. Desket en doa dija an arabeg p'edo e Norz-Afrika.

Beleg eo hag a-hed e vuhez e kendalc'ho gant e labour a veleg e parrezioù OUAGADOUGOU pe tro-war-dro. Met evel medisin eo deuet da vezañ brudet ha brudet bras, pell er-maez eus harzoù VOLTA-UHEL.

Ouzhpenn dek vloaz 'zo, un Afrikan a skrive diwar-e-benn :

«Bez 'ez eus «*SCHWEITZER-ien*» wirion ha na vezont ket pignet d'an uhel. Evidon-me, anavezout a ran unan, misioner tad gwenn medisin an daoulagad, emroet da Afrikaniz VOLTA-UHEL abaoe 1931. N'en deus ket graet ur seurt mirdi eus e gentañ ti-louzaouiñ dister. Labourat a ra en un doare arnevez o reiñ d'e labour ar vrasañ ment ma c'hell. N'eo ket awalc'h evitañ reiñ ar pare er c'hlañvdi, klasket en deus suraat da vat an trec'h war ar c'hlañvedoù.


E-touez stankañ kleñvedoù ar vro ez eus re an daoulagad ha war an dachenn-se e poanio kalonek an tad GOARNISSON. Hepdale, er vro a-bezh e vo kaoz eus an «*Doktor SKLERIJENN*». Barrek-tre eo war ar c'hleñvedoù-se en deus studiet a-zevri. Met siwazh dezhañ, e zaouarn n'int ket asur a-walc'h ha morse ne c'hello oberata e-unan. Ur seurez eus ar C'hanada e zeu d'e sikour. Ar glañvidi a zired buan, re vuan. Divizout a ra an tad deskif ar vicher da seurezed eus ar vro. Prenañ a ra daoulagad defved. Kenteliañ a ra ar seurezed-se en o yezh peogwir ne ouzont ket ar galleg. Oberatadennoù aes da gentañ, re ar malvennoù ha tamm ha tamm, diaesoc'h.

Aze e kroger da welout pezh a vo brasañ dellid an Doktor GOARNISSON, bezañ gouezet kenteliañ, furmiñ Afrikaniz da gemer perzh er stourm a-enep da gement kleñved grevus a waste n'eo ket hepken VOLTA-UHEL, met AFRIKA a-bezh, da skouer kleñved ar c'houk. Kenlabourat a raio gant medisined all evel-just, met digantañ e vo goulennet muioc'h-mui a glañvidiurezed ha klañvidiourien. Evito e savo ul levr e yezh ar vro. Diwezhatoc'h e troio e galleg al levr-se a vo reizhet ha nevesaet gantañ bep gwech ma vo adembannet. Ur pikol levr a 800 pajenn eo deuet da vezañ ha divizet en deus Aozadur-Bed ar Yec'hed degemer anezhañ evel dorn-levr evit holl vroioù «galleg» Afrika.

Ne felle ket din en ur pennad berr diskouez en he fezh personelezh pinvidik Yann-Loeiz GOARNISSON, met reiñ deoc'h ar c'hoant da anavezout gwelloc'h ur Breizhad kalz brudetoc'h en Afrika eget en e vro.

Emañ bremañ o c'hortoz sioul eur ar marv. Met kenderc'hel a ra da labourat. Dastum a ra krennlavarioù ar vro, adkroget en deus gant studi al louzeier henvoazel ha savet en deus e yezh ar vro, dreist-holl evit an dud diwar-ar-maez, taolenoù diwar-benn ar c'hleñvedoù. Troet int bet e galleg ha kavout a reer anezho bremañ n'eo ket hepken e VOLTA-UHEL, met en holl vroioù tro-war-dro.

Gab ar MOAL



Evit gouzout hiroc'h diwar-benn an «*Doktor SKLERIJENN*», ul levr galleg :

Roger de BENOIST, Père Blanc, DOCTEUR LUMIERE,
40 ans au service de l'Homme en Haute-Volta». Editions S.O.S., 106, rue du Bac - 75007 PARIS

«CRASH COURSE» e Skol-Veur Breizh-Uhel (Roazhon)

Da heul ar berzh bras graet warlene gant an devezhiou-studi askoridik bet aozet gant Skol-Veur Breizh-Uhel e miz Gouere 1975 (30 plas, 42 berzhiad) e vo aozet adarre seurt devezhiou-studi («*crash course*» evel ma lavar ar saoznegerien) eus al lun 5 a viz Gouere, da 9 eur betek ar sadorn 10 da greisteiz. Evit kaout titouroù hag en em skrivañ, skrivañ da :

Secrétariat de la Formation Continue (stage de breton - juillet 1976)
Université de Haute-Bretagne
Avenue Gaston Berger
35043 RENNES Villejean


KELEIER

Listri-krevier e lec'h eoullistri

Gant an enkadenn armerzhel ez eo aet ar c'henwerzh etrevroadel war zigreskifi kalz abaoe daou vloaz ha kalz listri, eoullistri dreist-holl, a chom dizimplij. E-keit-se, da heul kreskidigezh priz an tireoul eo deuet kalz broioù muzulmat da vezañ pinvidik a-walc'h ha c'hoant a zo bremañ gant an dud da vevañ gwelloc'h ha da gentañ holl da zebrifñ muioc'h a gig, kig-dañvad dreist-holl. Pelec'h prenañ kementadoù bras a gig-dañvad dre ar bed ? En Aostralia hag e Zeland-Nevez evel-just. N'eo ket ken aes se e gwirionez rak ar Vuzulmiz (evel ar Yuzevien) a fell dezho lazhañ al loened-se o-unan hervez o lidoù dezho. N'eus ket tu eta da gas palevarzhioù kig-dañvad dre listri-yenerized eus Aostralia da Arabia Saoudat. Ret eo kas an deñved bev, met n'eus lestr ebet evit dezougen miliadoù a zefved...

Setu perak eo bet divizet treuzfurmiñ un eoullistr alaman 51 412 tonenn e lestr-kraou, gouest da zezougen 50 000 penn-dañvad war un dro. Emeur oc'h ober al labour dic'hortoz-se en ur chanter Mitsubishi e Japan. Savet e vez ur c'hraou ramzel war ar pont hag al lestr a c'hello dezougen eoul c'hoazh dindan ar c'hraou...

Evit gwir n'eo ket al lestr kentañ a zeu da vezañ ul lestr-kraou e giz-se. Dija e miz Genver e oa bet treuzfurmet ul lestr-beajourien saoz, «*Cunard Ambassador*» e anv, en ul lestr-kraou gouest da zegemer 30 000 penn-dañvad. Ar re-mañ o deus kemeret lec'h an douristed !



Danvez kerañ ar bed

Danvez kerañ ar bed a zo ar radio-isotop Kaliforniom 252. Un danvez kalvezadel (artifisiel) eo peogwir ne vez ket kavet en natur. Koustañ a ra pep gram anezhañ 50 milion lur gall, 10 milion dollar ! Kenderc'het (produet) e vez er Stadoù-Unanet met n'eus bet ezhomm nemet eus 3 gram anezhañ e-korf dek vloaz !

Al listri ramzel ha saotradur ar morioù

Gouzañvet he deus hor bro dija kalz saotradur a-berzh an eoul-listri, eoullistri hag a zo aet da skeifi war ar reier evel an «*Torrey Canyon*» un nebeut bloavezhioù 'zo pe an «*Olympic Bravery*» e penn-kentañ ar bloaz-mañ, pe aliesoc'h eoullistri o tivalastrañ e Mor Breizh pe er Meurvor Atlantel hag o lezel war o lerc'h a bep seurt loustonioù a erru abred pe ziwezhat war aodoù Breizh. D'ar 5 a viz Ebrel en deus skoet un eoullistr ramzel, «*Mysella*» e anv, war ur varrenn e-kichen Singapore, o tegas ur «mare du» spontus war aodoù Malezia. Al lestr-se, bet moret e 1970 ha perc'hennet gant SHELL Tankers UK, a zezouge 212 750 tonenn eoul, da lavarout eo kalz-kalz muioc'h eget an «*Torrey Canyon*» pe an «*Olympic Bravery*». N'eus ket bet kalz pennadoù diwar-benn an darvoud spontus-se e kelaouennoù Breizh rak gwall-bell emañ Reter-Azia.


Nevez 'zo avat ez eus bet ur beñseadenn kalz tostoc'h eus Breizh, hini an eoullistr «*Urquiola*» hag en deus laosket er mor war-dro 100 000 tonenn eoul e-kichen porzh La Coruña, e Galisia. En em astennet en deus an eoul war ur gorread 3 700 000 km² ! Saotreet e voe ouzhpenn 100 km aod, ennañ 60 traezhenn darempredet-tre e-pad an hañv !...

Ha dañjerusoc'h eo al listri ramzel evit ar mor ? E gwirionez n'int ket dañjerusoc'h, suroc'h ne lavarint ket, met ma'z eus kudennoù hiziv gant an eoullistri eo dreist-holl en abeg da gresk sebezus ar c'henwerzh etrevroadel abaoe tregont vloaz ha d'ar c'hementadoù brasoc'h-brasañ a vez kaset eus ar broioù a genderc'h an tireoul betek ar broioù a vevez anezhañ. E deroù ar c'hantved e oa ar glaou an danvez-gremm pennañ, an tireoul eo bremañ. Bro-C'hall da skouer a denn 75 % eus he gremm diouzh an tireoul (ha Breizh moarvat kalz muioc'h, war-dro 95 % peogwir n'hon eus ket glaou na dourdredanvaou bras). E 1950, ned ae ket ment al listri kalz en tu all da 20 000 t. Ma vijemp chomet hiziv er bed gant listri 20 000 t hepken, ne vije ket 3 565 eoullistr dre ar bed evel ma'z eus, met ouzhpenn 20 000 ! Kalz niverusoc'h e vije ar gwallzarvoudoù hag ar c'henstokoù hep mar ebet.

Gwir eo kement-mañ ha gwir eo ivez e vez strivet kalz er chanterioù hiziv evit bihanaat ar riskloù ha krefivaat kouc'hoù al listri. Diwirheñvel eo e c'hoarvezfe gant ar «Batillus» da skouer pezh a zo c'hoarvezet gant an «Torrey Canyon». Lakaomp koulskoude e c'hoarvezfe : skrijus e vefe an heuliadennoù. Ur gwallzarvoud evel hini an «Torrey Canyon» a zo grevus-tre evel-just evit ur c'horn-bro met evit ur c'horn-bro hepken hag e-pad un nebeut bloavezhioù hepken. Ur gwall-zarvoud gant un eoullistr 540 000 t evel ar «Batillus» avat a dizhfe ur c'hevandir (douar-bras) a-bezh hag a lazhe pep buhez er mor evit mat. Lakaomp da skouer e c'hoarvezfe ur seurt gwallzarvoud er Mor Kreizdouarel : a-benn un nebeut sizhunvezhioù en em astennfe ar goc'henn eoul eus Maroko betek Siria hag e teufe ar mor-se, gwall-saotreet dija, da vezafi ur mor marv evit mat. Tu a zo eta d'en em c'houlenn hag-efi n'emañ ket mabden o c'hoari an danvez-sorser o sevel seurt eoullistri ramzel...

Jedet ez eus bet e veze skuilhet well-wazh war-dro 5 milion tonenn tireoul e morioù ar voull-douar bep vloaz, en o zouez :

- 2 480 000 t o tont eus ijinezehioù mabden hag o vont d'ar mor dre ar stêrioù
- 80 000 t o tont eus korvoidigezh an tireoul e strad ar mor («off shore»)
- 1 450 000 t laosket gant an eoullistri :
- 260 000 t pa naetaont o diabarzh (pezh a zo difennet, safiset)
- 210 000 t pa vez sammet an eoul enno pe disammet diouto
- 280 000 t er gwallzarvoudoù
- 700 000 t o tivalastrañ.



(Balastrañ un eoullistr a zo leuniañ un darn eus e gombodoù gant dour-mor evit ma ne vefe ket digempouezet, o vezafi goulo a-hend-all, e-pad ar veaj-distro. Pa erru an eoullistri e Plegmor Persia da skouer, o tont en-dro eus porzhioù Europa pe Norzamerika, e tivalastront, da lavarout eo e tisonkont kuit an dour-mor-se (ha gantañ evel-just eoul chomet e strad ar c'hombodoù) evit bezañ prest da zegemer tireoul nevez).

Ha dañjerus eo «Concorde» evit ar gwiskad ozon en-dro d'ar voull-douar ?

Kement-mañ a vez lavaret alies gant eneberien an nijerez-mañ ha n'eo ket aes gouzout pelec'h emañ ar wirionez. Gouzout a reer e kas an heol a bep seurt skinoù deomp, lod anezho o tegas deomp sklerijenn ha tommder, re all evel ar skinoù dreistmouk hag a c'hell bezañ dañjerus evidomp. Krefivoc'h eo ar re-mañ war ar menezioù uhel e-pad an hañv. N'eo ket mat chom re bell dindan an heol evel ma ra tud 'zo astennet war an traezh e-pad an hañv. Dre eurvad e vez harzet an darn vrasañ eus ar skinoù-se gant ar gwiskad-ozon. Hervez ar skiantourien eo a-bouez bras ar gwiskad-se. Ma'z afe ar gwiskad ozon-se war zigreskifi eus 0,5 % hepken e kreskfe eus 1 % ar c'hementad skinoù dreist-mouk degemeret gant mabden, ha da heul e kreskfe niver an dud tizhet gant krign-bev ar c'hroc'hen.

En arvar e c'hell bezañ lakaet ozon ar stratosfer gant an oksidoù nitrogen (azot) laosket gant dazloc'herioù «Concorde». E gwirionez ez eus dija nijerezed soudardel dre zazloc'h niverus hag a dreuz an aerglec'h bemdez ha talvezout a reont kement ha 50 «Concorde» o nijal 7 eurvezh bemdez. Kalz dañjerusoc'h eo an tarzhadennoù derc'hanel (nukleel) dindan an oabl ha talvezout a reont kement hag ar reuz graet gant miliadoù ha miliadoù a nijerezed dre zazloc'h. N'heller ket eta lakaat «Concorde» kiriek, pe da nebeutañ kiriek efi e-unan, eus ar riskloù degaset evit ar gwiskad-ozon en-dro d'ar voull-douar met kement-mañ a ziskouez c'hoazh emañ mabden o tizoleifi ez eus bevennoù d'ar greskidigezh hag emañ o vévafi war ur blanedenn vihan. Bras-tre eo deuet da vezafi hiziv galloud mabden, dre ar skiant, ken bras ma c'hell lakaat en arvar e vuhez dezhañ e-unan war an douar ma ne daol ket evezh.

AN TREDANVAOU DERC'HANEL (*kreizennoù nukleel*)

Komzet e vez kalz eus tredanvaou derc'hanel e Breizh abaoe daou vloaz. Kalz tud a sav a-du ganto dre ma seblantont bezañ ur chafis bras da reiñ lañs d'ar greanterezh e Breizh ha da grouiñ implijoù niverus er bloavezhioù a zeu. Kalz tud all a sav a-enep dre ma kav dezho n'int ket sur a-walc'h hag ez eus eta re a riskloù evit tud ar vro. Bez ez eus evel-just ur bern arguzennoù all a-enep hag a-du gant an tredanvaou derc'hanel. D'ar gudenn bouezus-mañ e vo gouestlet un darn vras eus niverenn miz Du ha laouen e vo **KELEIER** an **NAONED** da embann lizhiri al lennerien a roo o ali diwar-benn ar gudenn-mañ.

Tireoul e Mor Hirwazh ?


Emañ o paouez echuiñ al labour-toullañ strad ar mor dirak aodoù Breizh. Tri zoull a zo bet graet adalek an tour-toullañ «*Pentagone 84*» perc'hennet gant ar c'hevredad gall *Elf-Aquitaine*.

An toull kentañ (*Lizenn Nn 1*) a zo bet graet warlene etre miz Gouere ha miz Du. Diskennet eo ar binvioù-toullañ betek - 4 552 m met n'o deus kavet nemet klogorennoù metan.

An eil toull (*Lennek Nn 1*) a zo bet graet war dro 65 km en hanter-norz da Vrest etre miz Du 1975 ha miz Genver 1976. Diskennet eur betek - 2 762 m ha kavet ez eus bet roudoù eoul.

An trede toull (*Brezhel Nn 1*) a zo bet graet etre miz Genver ha miz Mezheven ha diskennet eur betek - 3 337 m.

Bremañ e tle mont an tour-toullañ «*Pentagone 84*» da Aberdeen evit toullañ strad ar mor dirak aodoù Bro-Skos ha ret e vo gortoz miz Meurzh 1977 a-raok ma vo graet toulloù nevez e Mor Hirwazh. E-keit-se e vo amzer da zielfennañ an douar hag ar roc'h bet tennet eus kondon ar mor. Diaes e vo gouzout ar wirionez diwar-benn pezh a zo dindan strad ar mor rak n'eo ket termenet mat an harzoù gant Bro-Saoz. Aon bras o deus ivez renerien Bariz rak an heuliadennoù politikel a vefe e Breizh e Breizh goude dizoloïdigezh tireoul dindan ar mor. Nec'het int gant pezh a c'hoarvez e Bro-Skos abaoe daou vloaz.



MAE

- 1 Gouel poblek war ribl an Erz
- 1 Fest-noz e Sant-Sebastian Porniched (*Chal ha Dichal*)
- 8 Fest-noz e Sant-Molf
- 8 Arvestadeg gant Kelc'h Ourvez «*Breizh Hiziv*»
- 9 Korolladeg vreizhat e Naoned
- 8/9 Dibenn-sizhun studi ar brezhoneg e Gwennrann (K.S.I.B.)
- 15 Fest-noz e Santez-Lus gant Dir-ha-Tan (Kelc'h Breizhek an Naoned)
- 15 Fest-noz e Reze gant an «*Namnètes*»
- 16 Fest-noz e Janz (Kelc'h Keltiek Janz)

- 20 Koan ar Vrezhonegerien e Naoned
- 22 Fest-noz e Sucé
- 22 Fest-noz e Sant-Nazer
- 23 Korolladeg vreizhat e Sant-Nazer ha kenstrivadeg sonerien
- 23 Oferenn en iliz Sant-Similian evit gouel Sant-Erwan
- 29 Fest-noz e Saillé

MEZHEVEN

- 5 Fest-noz e Norz-war-Erz (Kelc'h Keltiek Norz)
- 6 Fest-noz er Groazig
- 10/24 **PEMZEKTEZ KELTIEK AN NAONED**
- 11 Arvestadeg-koroll e Kastell Epinay, e Kerc'hfaou gant ar Strollad «*Kilher*»
- 12 Fest-noz e Kervaled
- 14/19 Gouelioù ar straed Kervegan, e kreiz-kêr Naoned
- 20 Gouel Sant-Yann e Teillé (Kelc'h Keltiek Teillé)
- 20 Gouel ar Sicaudais («*Bretagne Vivante*»)
- 24 Gouel Sant-Yann e Kastell an Duged
- 26 Fest-noz e Santez-Lus (Kelc'h Keltiek Ourvez)
- 26 Fest-noz e Sant-Nazer
- 26 Fest-noz e Sucé
- 27 Korolladeg vreizhat en Eskobleg

GOUEL AN UNVANIEZH

Ur berzh bras en deus graet Gouel an Unvaniezh d'ar 25 a viz Ebrel en Naoned hag ouzhpenn 5 000 den o deus kemeret perzh ennañ.



Ar gouel e porzh ar c'hastell (kliched Kendalc'h)

Kroget en deus ar gouel e porzh ar C'hastell (Kastell Duged Breizh) hag hemañ a voe leun-kouch buan-tre. Eus 14 e 30 betek 18 e 30 ez eus bet prezegennoù ha sonerezh diouzh tro. Kinniget e oa ar brezegennerien hag an arzourien gant Per ROY (Prezidant Skoazell Vreizh ha pennskrivagner ar gelaouenn «Breiz»). Klevet e voe Christian ROY (eil maer an Naoned), Gi CARO (FASAB), Claude CHAMPAUD (CELIB), an Ao. FLOC'H (PS, eil maer Reze), Ivonnig GICQUEL (Kendalc'h), Bernard LE GRAND (sededour Bro-Naoned), an Ao. LHOSTIS (PSU), Michel PHILIPONNEAU (BREIS), Aldrig RUSSON (UDB), ha Per DENEZ, hag ivez arzourien evel an *Endreziz*, Jean-Claude PEDRON, Alan STIVELL, An «*Namnètes*», Skolf, Jil SERVAT, Gweltaz ar FUR...



Jil SERVAT o kanañ (kliched Kendalc'h)



Alan STIVELL o kanañ (kliched Kendalc'h)

(Miched Kendalc'h)



An dibunadeg e

straed ar c'halvar

Goude-se e krogas un dibunadeg hir a dremenas e-pad div eurvezh dre straedoù kreiz-kêr an Naoned : leurenn ar roue, leurenn Graslin, leurenn Delorme, straed ar c'halvar, h.a. betek erruout er prefeddi e lec'h ma voe roet ul lizher da sekretour ar prefed da gas d'an Ao. GISCARD, ar prezidant gall.

Dre vras e voe ar gouel-mañ un trec'h. Arabat disofijal ne oa deuet nemet 300 den en ur dibunadeg aozet tri bloaz 'zo en Naoned evit goulenn ma chomfe stag Bro-Naoned ouzh peurrest Breizh. Sebezus eo al labour a voe kaset en-dro gant emsaverien ar wech-mañ. Peget ez eus bet skritelloù e pevar c'horn ar vro, en Ansiniz, e Bro-Raez, e ledenez Werrann hag evel-just e peurrest Breizh. Deuet eo meur a garr-boutin da zegas tud d'an Naoned. An dibunadeg dre straedoù an Naoned a voe moarvat an hini vrasañ en istor an Emsav (e Pontivi e oa bet bodet 1 200 den e 1973, hag e Gwengamp tost da 3 000 e 1975, ar wech-mañ e oa etre 5 000 ha 6 000 den en Naoned !).

Yaouank-tre e oa darn vrasañ ar berzhidi ha kement-mañ a zo kalonekaüs-tre. Un darn vras eus yaouankizoù Breizh a gemer perzh e buhez an Emsav hiziv. Ret eo anzav koulskoude ne oa ket deuet kalz Naonediz, er-maez eus an emsaverien niverus eus Bro-Naoned (met gwir eo ivez kement-mañ siwazh evit kement dibunadeg aozet gant strolladoù politikel pe sindikadoù, peurliesañ n'eus ket ouzhpenn 1 000 pe 1 500 den o kemer perzh enno).

Arabat en em douellañ koulskoude. Pennadoù bras a zo bet e kelaouennoù Bro-Naoned an deiz war-lerc'h met n'eus bet koulz lavaret ger ebet e kelaouennoù Paris nag e lec'hioù all. Kenderc'hel a ra al labour-diskar bemdez er skolioù, er c'helaouennoù, er melestradur, er skingomz, er skinwel... A-benn un nebeut sizhunvezhioù e vo bet disofijet ar gouel-mañ gant Naonediz ha pep tra a vo da adober. Al labour evit adunvanidigezh Vreizh a zo ul labour da gas en-dro bemdez ha n'eo ket ur wech ar bloaz hepken.

Donas ian GOULLIN

GOUEL AR BREZHONEG

Aozet e vo Gouel ar Brezhoneg hevlene e Pont'n-Abad, eus ar 4 d'ar 7 a viz Mezheven. E Gwengamp, e Bro-Dreger, e voe aozet Gouel ar Brezhoneg evit ar wech kentañ er Pentekost 1974. Warlene e voe graet e Bro-Leon, e Kastell-Paol. Tremena a ra ar wech-mañ e Bro-Gernev, er Vro-Vigoudenn. Setu program ar gouel :

Gwener 4 Beilhadeg da 9 eur noz

Sadorn 5 Tro ar Vro Vigoudenn (gant kirri) diouzh an endervezh
Da 17 eur, taol-grenn diwar-benn Breizh hag ar brezhoneg gant dileuridi eus strolladoù politikel, sindikadoù hag aozadurioù sevenadurel
Da 9 eur noz, daou bezh-c'hoari gant strollad Brest :

- *Ki-luks, un nozvezhiad gant ar re Bariz*
- *Un tamm douar divalav*

Sul 6 Diskouezadeg, kanaouennoù, c'hoarioù a-hed an endervezh
Da 7 eur noz, pezh-c'hoari gant strollad ar Vro-Bagan : *Meurlarjéz*
Da 9 eur noz, fest-noz

Lun 7

Lun 7 Diouzh an endervezh, fest-deiz

Ar c'habiten HERVOUET a erruas d'an eur merket an deiz war-lerc'h ha senifi a reas ha goulenn an Dimezell DREANO. Ur vatezh a zigoras dezhañ.

« An Dimezell DREANO ? Aet eo kuit.

— Ha ! HERVOUET ne gredas ket goulenn an aotre da vont e-barzh an ti da c'hortoz anezhi. «Distreñf a rin a-benn ur pennad», emezañ.

Ergerzhout a reas ribl all ar straed engortoz da welout Marc'harid o tont davetañ. Ar munutennoù a dremenas. Seiz eur nemet kard. Seizh eur. Seizh eur ha kard. Marc'harid ebet c'hoazh. En em santout a reas diaesoc'h-diaesañ. Mont a reas betek an ti ha senifi adarre.

«Selaouit», emezañ. «Un emgav am boa gant an Dimezell DREANO da c'hwec'h eur hanter. C'hwi zo sur n'emañ ket en ti ? Pe marteze he deus lezet ur gerig bennak evidon ?

— C'hwi 'zo ar c'habiten HERVOUET ?», a c'houlennas ar vatezh.

— Ya.

— Neuze ez eus un notenn evidoc'h. Degaset eo bet gant ur paotr...».

HERVOUET a gemeras al lizher diganti hag a rogas buan ar golo. Kement-mañ a oa skrivet :

Kabiten HERVOUET ker,

Un dra iskis a-walc'h a zo c'hoarvezet. Ne skrivan ket muioc'h bremañ met daoust hag-efñ e c'hellit dont d'am c'havout e ti Kulmann e Chantenay ? Deuit kerkent ha m'ho po lennet kement-mañ Mallus eo.

A galon ganeoc'h.

Marc'harid DREANO

HERVOUET a grizas e dal e-pad m'edo o soñjal buan. Tennañ a reas ul lizher eus e chakod. Ul lizher d'e gemennerez e oa. «Hag-efñ ho pije ar vadelezh da brestañ din un timbr ?» eme d'ar vatezh.

— Moarvat, an Itron POGU, ar berc'henez, a c'hello rentañ deoc'h ar servij-se».

Distreñf a reas goude ur pennadig gant un timbr. Reñf a reas dezhi un nebeut gwenneien. Ur vunutenn war-lerc'h edo HERVOUET o kerzhout war-du ehanlec'h ar c'harr-boutin o kas da Chantenay. Teurel a reas ar golo-lizher en ur voest o tremen dirazi.

Lizher Marc'harid a brederie anezhañ. Peseurt abeg en doa gellet boutañ ar plac'h da vont en-dro hec'h-unan-penn d'al lec'h ma oa c'hoarvezet darvoudoù skrijus ganti an deiz araok ?

Hejañ a reas e benn. Iskis e oa an traoù. Ha deuet e oa an Ao. MULLER en-dro ? Ha deuet e oa e doare pe zoare a-benn da lakaat ar plac'h da gaout fiziañs ennañ ? Perak e oa distroet Marc'harid da Chantenay ?

Sellout a reas ouzh e eurier. Ar c'harr-boutin ned ae ket buan. Tost da seizh eur hanter. Hi he doa soñjet e loc'hfe-efñ da c'hwec'h eur hanter. Un eurverzh dale ! Se oa re. Perak 'ta n'he doa ket roet un nebeut displegadennoù en he lizher.

Strafuilhet e oa gant al lizher-se. E zoare disaouzan ne glote ket tamm ebet gant temz-spered Marc'harid DREANO.

War-dro eizh eur nemet dek e oa pa dizhas ar straed Jules Launay. Noziñ a rae. Sellout a reas pizh en-dro dezhañ. Ne oa den ebet. Goustadik e vountas ar porrastell evit chom hep ober an disterañ trouz. Goullo e oa ar porzh. Tefival an ti. Kerzhout a reas gant evezh o sellout a zehou hag a gleiz. N'en doa ket c'hoant da vezañ tapet dre un taol dic'hortoz.

A-greiz-holl e chomas a-sav. E-pad ur vunutennig en doa gwelet ur frailh sklerijennet dre unan eus ar stalafioù. Ne oa ket goullo an ti eta. Bez e oa unan bennak en diabarzh.

Goustadik e risklas Wilbraham er bodoù ha neuze en em stlejas war-du diadrefiv an ti. En dibenn e kavas pezh edo o klask. Unan eus prenestroù ar rez-douar ne oa ket prennet. Prenestr un doare adkegin e oa. Sevel a reas ar stern goustadig, enaouñf ul lamp-godell (en doa prenet en ur stal en ur zont) evit slerijennañ diabarzh ar sal. Pignat a reas e-barzh.

Gant evezh e tigoras dor an adkegin. Ne oa trouz ebet. Enaouñf a reas e lamp adarre. Ur gegin c'houllo. Pelloc'h e oa un daouzek derez bennak hag un nor o kas d'ar salioù a skoe war gostez ar straed, hep mar ebet.

Bountañ a reas goustadik war an nor ha selaou. Netra. En em silañ a reas er sal nevez. Edo bremañ en ur sal vras. Ne oa trouz ebet. Bez e oa un nor o skeñf war an tu dehou hag un nor all war an tu kleiz. Dibab a reas dor an tu dehou, selaou e-pad ur pennad ha neuze treñf goustadik an dornell. Ne oa ket morailhet. Goustadik-tre e tigoras an nor hag e yelas war-raok.

Enaouñf a reas e lamp adarre. Ne oa pezh arrebeuri ebet er sal.

Dres d'ar poent-se e klevas un trouz a-drefiv dezhañ. Treñf a reas re ziwezhat. Un taol spontus a zegemeras war e benn ha kouezhañ a reas semplet...

(Da genderc'hel)